

230

LE DOUTEUR  
LE DRAGON  
DOUBRILL



KAN  
HA  
KAN  
ATAO



# BRO-GOZ MA ZADOU

## I

Ni Breiziz a galon, karomp hon gwir Vro !  
Brudet eo an Arvor dre ar bed tro-dro !  
Dispont 'kreiz ar brezel, hon tadou ken mat  
A skuilhaz eviti o gwad.

## DISKAN

O Breiz ! Ma bro ! me gar ma bro ;  
Tre ma vo 'r mor 'vel mur'n he zro,  
Ra vezo digabestr ma bro !

## II

Breiz, douar ar Zent koz, douar ar Varzed,  
N'euz bro-all a garan kement 'barz ar bed ;  
Peb menez, peb traonien d'am c'halon zo ker :  
Enno 'kousk meur a Vreizad têt !

## III

Ar Vretoned a zo tud kalet ha krenv ;  
N'euz pobl ken kalonek a-zindan an nenv ;  
Gwerz trist, son dudioz a ziwan eno ;  
O ! pegen kaer ec'h out, ma bro !


## IV

Mar deo bet trec'het Breiz er brezelliou braz,  
He yez a zo bepred ken beo ha biskoaz ;  
He c'halon virvidik a lamm c'hoaz 'n he c'hreiz,  
Dihunet out brema, ma Breiz !

TALDIR.

# Breizh·Breizhane

- ⊙ Evêchés
- Villes principales
- Limites des Evêchés
- +++++ Limites du Breizh



Enez Gusa  
Ile d'Ouessant

Enez Sein  
Ile de Sein

bro-leon  
Brest  
St. Glorn

bro-breger  
Morlaix  
Guingamp  
Guingamp

bro-gerne  
Kemper  
An Oriant  
Lorient

bro-wared  
Pontrivy  
Ar-Blavoec'h

bro-s-brieg  
Dinan  
La Hance

bro-s-malo  
Ballon  
Redon

bro-zol  
St. Malo

bro-rezon  
Roazon  
Fougeres  
Foujèra

bro-naned  
NANTES  
NAONC'h

La Loire  
ED

Enez an gear  
Belle-Ile

Enez Goc'h  
Ile de Groix



# C'HOANT DIMEZI!!

Pa'z ouñ plac'h enor gant Marjeann o vont da jench e a -  
- no e rankan sevel eur bom-kar hag holl c'houi a ziska -  
*Diskan*  
no .. Dao jabadao Dao jabadao ma ti-mezo ar yaou-  
ankiz Dao jabadao Dao jabadao ma ti-mezo merc'h ar Mao.

The image shows a musical score for a Breton song. It consists of four staves of music in G major (one flat) and 2/4 time. The lyrics are written in Breton. The first staff begins with a treble clef, a key signature of one flat, and a 2/4 time signature. The lyrics are: 'Pa'z ouñ plac'h enor gant Marjeann o vont da jench e a -'. The second staff continues: '- no e rankan sevel eur bom-kar hag holl c'houi a ziska -'. The third staff starts with the word 'Diskan' in italics, followed by 'no .. Dao jabadao Dao jabadao ma ti-mezo ar yaou-'. The fourth staff concludes with 'ankiz Dao jabadao Dao jabadao ma ti-mezo merc'h ar Mao.'

2

Marjeann ' deus kavet eur pried  
Ha n'ehan ket da c'hoarzin,  
Ha me ne gavan hini ebet!  
Eun deiz bennak e kavin.

3

Gant va gwaz enor Yann ar Gall  
A zeou, a gleiz me redo  
Hemez a dalv koulz hag eun all  
Marteze d'in e kano:

4

Epad al lein ganeomp hon daou  
Betek an eur ziveza  
E vezo leun a varvailhaou  
Marteze ' plijin dezan.

5


Hag e vo klevet eur wech all  
Ar c'hleier war an tiez  
O kana : Soaz ha Yan ar Gall  
O vont da jench breuriez!

## *Diskan*


Dao jabadao! Dao jabadao  
Ma timezo ar yaouankiz  
Dao jabadao! Dao jabadao  
Ma timezo merc'h ar Mao.

# ROUM


*allegretto*




Di-sul pa oan o pourmen hed a hed an hent bras hed a hed



an hent bras Me welas en eur c'hornig eun os-ta-le-ri c'hlas



Roum fa-la-ri-don-de-nig Yé, fa-la-ri-don-de'.



Yé fa-la-ri donde.

## Diskan

Roum, falari dondeno

Yé!

Chach da c'har a-drenv.

2

Ha iao en ostaleri  
Ha staget da eva,  
Me glevas eur paotr bihan  
'N e gavel o ouela.

3

'N e gichen eur plac'h yaouank  
Paotrez a c'houezek vloaz  
Azezet war eur gador  
Hag he diou c'har en noaz

4

He mamm a lavar d'in-me:  
— Houman ne daly netra,  
Redet gant paotred yaouank  
Setu ar pez a ra.

5

— Mamm, me pa 'z ean da bourmen  
Gave ket d'in oa fall  
Gant va c'hamaradezed  
Mont da heul ar re all

6

— Ma karfez beza chomet  
Er gêr da labourat  
Ne vije ket bet breman  
En ti o luskellat.

## AR BENHEREZ

Deiz mat d'ar holl dud en ti-mañ, deiz mat d'ar  
holl dud en ti-mañ Ma-ri-jean-ig e plac'h e-  
Diskan  
-ma ? O ram tam tam tari da, ri-da o ram tam  
tam ta-ri-da

The image shows a musical score for the song 'Ar Benherez'. It consists of four staves of music. The first staff is a treble clef with a 2/4 time signature. The lyrics are written below the notes. The second staff continues the melody and lyrics. The third staff has a double bar line and then continues with the lyrics 'O ram tam tam tari da, ri-da o ram tam'. The fourth staff ends with a double bar line and the lyrics 'tam ta-ri-da'.

### Diskan

O ram tam tam tarida

Rida

O ram tam tam tarida

2

— Ma 'z eo 'r benherez a glaskit,  
Abredik mat eo kerzet kuit.

3

Kit d'ar penn all d'ar wenojen  
Eno ema war bord al lenn.

4

— Deiz mat deoc'h-c'houi, plac'hig al lenn  
Na c'houi zo mat da Walc'hi gwenn !

5

Na c'houi zo mat da walc'hi gwenn,  
C'houi ' walc'ho d'in-me va chupen.

6

— Ne walc'hin ket d'it da jupen,  
Kerz ac'halesse da bourmen.

7

Diou wenojen zo tost d'an ti,  
Unan d'ar c'haz, eun all d'ar c'hi.

8

Unan d'ar c'haz, eun all d'ar c'hi,  
Kemer unan... ha fil ganti.

## AN TOUR DANTELEZET

E Kastel Paol ez om, me ga-net, o Kêar zan-  
tel a vro Leon, o parrez va c'hentadou ka-ret, te zo rou-  
-a-noz va c'halon.  
Nann ne zeus ket Nann ne zeus ket eur barrez ker mad d'ar galon er  
bed Me gar va c'hleuz alaouret, va zour dantelezet.)

Eur gouriz mor a deu da voalc'hi  
Ha da drempa hon douarou;  
Pa vez ar gourlenn, pebez dudi  
Taoler eur zell var hon aotchou!

Hon touriou kaer ha dantelezet  
A bar an deiz laouen dreizo,  
Hon iliz vraz, ker brao kizelle,  
Zo gwir Rouanez an holl vro.

Var dour Greisker, gwintret en uhel,  
Ma zonz d'in klevet aliez  
Ar c'hillok o kana en avel:  
Kastelliz, karit ho parrez!

### Diskan

Nann, ne 'z euz ket, nann, ne 'z euz ket  
Eur barrez ker mad d'ar galon er bed!  
Me gar va c'hleuz alaouret, va zour dantelezet! (bis)

# PRENIT !

Procurez-vous !

## KANAOUENNOU AR VRO

Les Chants Bretons

**TRALALALALENO** - dernier ouvrage de Jef Le Penven (E.M.B. Paris), 30 chants bretons harmonisés à 2 et 3 voix égales, format de poche - L'exemplaire 120 frs.

**SONIOU HA MOJENNOU** - Potr Treoure  
20 chansons, 3 monologues, 60 fables. 150 frs.

**KANAOUENNOU** - 12 chants harmonisés à 4 voix mixtes, par Jef Le Penven - L'exp. ordinaire 140 frs.  
— de luxe 260 frs.

**SONIT' TA SONERION** - 150 airs pour biniou - bombarde - L'exp. : 285 frs. - L'exp. de luxe : 400 frs.

**KAN HA DISKAN** - 6 chants bretons sur feuilles volantes - premiers chants parus - les six 100 frs.

**E GWERZH :**

EN VENTE :

ar  
**balb**

Sté BALB : B. P. 108 Rennes - C.C.P. 1.171-35